

1

Prestik goude dispartiañ diouzh va gwreg em boa graet anaoudegezh gant Dean. Neuze e oan o paouez gwellaat war-lerc'h ur c'hleñved grevus ne vo ket kaoz anezhañ amañ, panevet e oa liammet, mod pe vod, gant an disrann mantrus ha diwaskus-se hag gant ar santad e oa bet tanfoeltret pep tra. Gant donedigezh Dean Moriarty e oa bet loc'het ur rann eus va buhez a c'hellfed ober va buhez war an hent anezhañ. A-raok se em boa bet c'hoariet meur a wech gant ar soñj mont etrezek ar C'hornôg da weladenniñ ar vro, diwar raktresoù dispis bepred, ha ne oant morse deuet da wir. Ha pa 'z eus kaoz eus mont en hent, n'eus den ebet gwelloc'h eget Dean, rak ganet e oa war an hent end-eeun, pa oa e dud o tremen gant o strakell gozh dre Salt Lake City e 1926, war o hent da Los Angeles. Digant Chad King 'm boa klevet anv anezhañ evit ar wech kentañ. Diskouezet en doa din un toullad lizhiri skrivet gant Dean en ur skol-bac'h e New Mexico. Desachet-spontus e oan bet gant al lizhiri-se ha gant an doare kredus ha dereat-meurbet ma c'houlenne digant Chad deskiñ dezhañ pep tra diwar-benn Nietzsche ha diskuliañ evitañ e deñzor a ouiziegezh speredel burzhudus. 'Poent bennak em boa komzet gant Carlo diwar-benn al lizhiri-se, hag en em c'houlenn a raemp hag-eñ e tichañsfemp kejañ gant an iskis a zen-se, Dean Moriarty. Komz a ran deoc'h deus un amzer

wechall, pa ne oa ket c'hoazh Dean an den m'eo deuet da vezañ, pa ne oa nemet ur paotr yaouank dindan dorn ar justis, un aura kevrinus en-dro dezhañ. Neuze e voe klevet e oa bet dibrizoniet Dean, hag eñ o troc'hañ hent etrezek New York evit ar wech kentañ. Lâret e veze ivez e oa o paouez dimeziñ gant ur plac'h anvet Marylou.

Un deiz ma oan o kantren dre kampus ar Skol-veur em boa klevet digant Chad ha Tim Gray e oa Dean o chom en ur c'hozh toull hep dour tomm e East Harlem, karter latino Harlem. En em gavet e oa Dean e-kreiz an noz e New York, ar wech kentañ dezhañ, asambles gant Marylou, e goantenn a chevrenn vihan dilu. En 50^{vet} straed e oant diskennet eus ar bus Greyhound, ha treuzet an hent evit kaout un dra bennak da zebriñ, ha dao war-eeun betek ti Hector e korn ar straed, hag abaoe an amzer-se e oa chomet cafeteria Hector arouez meur New York evit Dean. Dispignet o doa o arc'hant war melloù kouignoù kaer, sukr-skorn ha kaol-dienn warno.

Ne baoueze ket Dean da gontañ traoù evel-se da Marylou : « Bremañ, karedig, emaomp e New York, ha daoust 'm eus ket kontet dit an holl draoù a dremene dre va fenn pa oamp o treuziñ ar stad Missouri, ha dreist-holl pa oamp o tremen hebiou ti-kastiz Booneville, 'pezh en doa degaset soñj din eus va c'hudennoù prizon, retmat eo deomp bremañ lakaat a-gostez evit ar poent tout an traoù ha n'int ket bet sklaeraet c'hoazh diwar-benn hon aferioù karantez, hag en em lakaat diouzhtu-dak da soñjal e raktresoù buhez resis... » hag all hag all, gant an doare ma oa e hini da gomz er mareoù-se.

Aet e oamp d'e lojeiz laou gant ar baotred all, ha deuet e oa e toull an nor en e vragoù dindan. Tra ma oa Marylou o lammat diwar ar gwele en doa kaset Dean al lojer all

d'ar gegin, da fardañ kafe moarvat, e-keit ma tifrete-eñ evit dirouestlañ e gudennoù karantez, rak evitañ e oa ar seks an dra santel ha pouezus nemetañ er vuhez, daoust ma ranke kiañ ha stourm evit gounit e vara pemdez ha tout. Anat e oa, dre e zoare da hejañ-dihejañ e benn, e zaoulagad paret d'an traoñ, evel ma rafe ur bokser yaouank o selaou kuzulioù e c'hourdoner, e felle dezhañ diskouez pegen aketus e selaoue kement poz distaget, hag eñ o tibunañ diehan un aridennad « ya-ya » ha « re wir eo ». Pa welis anezhañ e roas din da soñjal en ur Gene Autry¹ yaouank – unan moan, treut e zargreiz, glas e zaoulagad, pouez-mouezh kreñv Oklahoma gantañ –, un haroz e gizennadoù hir eus ar C'hornôg erc'hek. Hag e gwirionez e oa bet o labourat war ur ranch, hini Ed Wall e Colorado, just a-raok dimeziñ gant Marylou ha dont d'ar Reter. Ur veleganez gaer e oa Marylou, he blev hir-tre par d'ur mor a wagennoù alaouret. Azezet e oa eno war ar sofa, he daouarn war he barlenn hag he daoulagad glas moredet a blac'h diwar ar maez o sellet en egor, sac'het-mat ma oa eno, e unan eus ar c'hozh toulloù lugudus-se e kêr New York he doa klevet komz anezho er C'hornôg, evel unan eus ar maouezed surrealist hir ha treut-ki bet malet en ur gambr a-feson gant Modigliani. Padal, en tu all da vezañ ur plac'hig amiañ e oa ivez sot-pout, ha gouest d'ober traoù euzhus. En noz-se hon doa evet bier, c'hoariet plegañ-pognez, ha marvailhet betek gouloù-deiz, ha diouzh ar mintin, ha ni abafet en hor c'hoazez o vutuniñ bechadoù sigaretennoù pennaouet e podoù-ludu dindan sklêrijenn dister un devezh reuzeudik, e oa savet Dean trumm en

1 Gene Autry (1907-1998). Kaner hag aktour brudet evit e berzhioù *cowboy*.

e sav, hag eñ mont ha dont nervus dre ar gambr, soñjus, hag en doa lavaret ne chome nemet un dra d'ober : da Marylou da fardañ un tamm dijuni ha da skubañ al leur. « Da lavaret eo, dav deomp kregiñ e-barzh, karedig, setu 'pezh a lâran, mod all e chomo pep tra a-stlej, ha ne vo ket tu deomp kaout ur gompreneson wir eus an doare da gas hor raktresoù war-raok. » Neuze e oan aet kuit.

E-kerzh ar sizhun war-lerc'h e lavaras da Chad e ranke, kousto pe gousto, deskiñ skrivañ digantañ. Skrivagner e oan-me, eme Chad, ha mat e vefe dezhañ mont da welet ac'hanon evit kaout kuzul. Etretant en doa kavet Dean labour en ur parklec'h, hag en em zrailhet en doa gant Marylou en o lojeiz e Hoboken – Doue 'oar perak e oant aet di –, ha ken fuloret ar plac'h ha ken don enni ar c'hoant d'en em veñjiñ m'he doa savet klemm d'ar polis dindan n'ouzon ket peseurt digarez foll hag histerek, setu m'en doa ranket Dean skarzhañ kuit eus Hoboken. N'en doa neuze plas ebet da lojañ. Ha setu-eñ o tont war-eeun da Paterson, New Jersey, e-lec'h ma oan o chom gant va moereb, hag un nozvezh ma oan o studial e klevis lopañ ouzh an nor, hag eno e oa Dean e teñvalijenn an trepas, stouet e benn, o ruzañ e dreid, dreistzoujus : « Salud, ha soñj 'peus ac'hanon, Dean Moriarty ? Deuet on da c'houlenn diganez deskiñ din skrivañ. »

« Ha pelec'h emañ Marylou ? » 'm boa goulennet, hag eñ respont he doa gounezet un nebeud dollarioù, o werzhañ he revr, 'michañs, hag aet kuit da Denver, “ar c'hast” ! Neuze e oamp aet kuit da evañ ur banne bier rak ne oa ket tu da gomz eus an traoù a zedenne ac'hanomp dirak va moereb, a oa er saloñs o lenn he c'hazetenn. Taolet he doa ur sell ouzh Dean ha graet kerkent he soñj : sot-nay e oa an den.

— Gast, paotr, goût a ran mat n'out ket deuet betek amañ hepken peogwir e fell dit mont da skrivagner, ha petra ouzon-me deus an dra-se 'benn ar fin, nemet er rankez chom atav ouzh ar stern, gant un energiezh par da hini unan dindan benzedrin, a lâris dezhañ en davarn.

— Ya, evel-just, kompren a ran dres 'pezh 'peus c'hoant da lâret, hag e gwirionez, tout ar c'hudennoù-se zo c'hoarvezet din, met ar pezh a fell din ober eo kas da benn an holl faktorioù a denn eus divrannerezh Schopenhauer e-keñver kement tra sevenet dre guzh...

Hag all hag all, en un doare ma ne gomprenen grik eus ar pezh a lâre, nag eñ kennebeut.

D'ar mare-se ne ouie dare talvoudegezh ar gerioù implijet gantañ ; e gwirionez e oa ur paotr yaouank o paouez kuitaat e skol-gastiz, trelatet-holl gant an hunvre burzhudus dont da vezañ ur gwir den a spered, ha plijout a rae dezhañ komz war an ton ha gant ar gerioù-se, foutouilhek ha mell-divell avat, traoù en doa bet klevet digant “kefredourien wir”, met arabat soñjal e oa ken kredus-se war zachennoù all, ha dindan un toulladig mizioù e kompagnunezh Carlo Marx e oa deuet da vezañ en e vleud gant geriaoueg ha luc'haj ar metoù-se. War liveoù all a follentez en em glevemp mat avat, hag asantiñ a ris e chomfe en va zi betek ma kavfe labour, hag ouzhpenn-se e voe divizet mont asambles d'ar C'hornôg d'ur poent bennak. Se 'oa er goañv 1947.

Un nozvezh ma oa Dean o koaniañ em zi – krog e oa dija da labourat er parklec'h e New York – e stouas a-us din tra ma oan o vizkrivañ a-zevri hag e lavaras :

— Deus 'ta paotr, arabat lezel ar merc'hed-se da c'he-dal, hast buan.

— Gortoz ul lajadig, amzer din da echuiñ ar pennad-

mañ, emezon, hag hennezh a oa unan eus gwellañ pen-
nadoù al levr.

Neuze en em wiskis, ha dao d'ar red da welet merc'hed
e New York. Hag e-barzh ar bus, dindan gouleier islonk
iskis treluc'hek al Lincoln Tunnel, an eil kostezet war-
zu egile, gant hon daouarn o fistoulat, ha ni o yudal
hag o chaokat evel tud diboell, eno eo e pegas ennon
kleñved-red Dean. Ne oa nemet ur paotr yaouank
trelatet-sovaj gant ar vuhez, ha n'eo nemet diwar nerzh
spontus e c'hoant da vevañ hag e youl d'ober traoù gant
tud ha n'o dije ket taolet pled outañ a-hend-all e teue
e drubarderezh. Gouzout a ouien mat e oa o trubardiñ
ac'hanon (abalamour da gaout bod ha boued, ha "kente-
lioù skrivañ"), ha goût a ouie e ouien-me (pezh a oa
deuet da vevañ diazez hon darempred), met ne raen ket
foutre kaer, hag en em glevet mat a raemp, didrubuilh ha
diardoù ; en hon mignoniezh nevez-flamm e rae aketus
ha teneraus an eil war-dro egile. Krog e oan, moarvat, da
zeskiñ kement a draoù digantañ hag a zeske diganin. Evit
'pezh a selle ouzh va labour e lavare : « Kendalc'h e-giz-se,
tout 'pezh a rez a zo dreist. » Sellet a rae a-us da'm skoaz
tra ma oan o skrivañ istorioù, en ur huchal : « Ya ! Se an
hini eo ! Gast ! Puten ! » ha « Waow, » hag eñ torchañ e
fas gant e vouchouer.

— Va Doue, na kement a draoù zo d'ober, kement a
draoù da skrivañ diwar o fenn ! Ha penaos *stagañ* ganti
zoken, skrivañ anezho tout, hep strob ar c'hoñvañsionoù
ha tout ar skoilhoù-se, gwask al lennegezh hag hini ar
yezhadur...

— Ya, se 'ni eo, va faotr, aze 'maout 'kaozeal, emezañ,
hag e welen un doare luc'hed santel o strinkañ diwar e
virvilh hag e weledigezhioù, a zeue digantañ gant kement

a herr ma troe o fennoù an holl dud er bus evit gwelet piv 'oa an “inosant dreiststennet”-se.

Er C'hornôg en doa tremenet un drederenn eus e amzer er salioù-bilhard, un drederenn all en toull-bac'h hag al lodenn ziwezhañ el levraoueg publik. Gwelet e oa bet o c'hwistañ dre ar straedoù er goañv, didog, o kas levrioù gantañ d'ar bilhard, pe o pignat er gwez evit en em silañ e-barzh solieroù ti kamaraded, ma tremene eno deizioù-pad o lenn pe o skoachañ diouzh ar flied.

Aet e oamp da New York – na 'm eus ket soñj resis evit petra, div vaouez zu marteze – met ne oa plac'h ebet du-se ; sañset e oant da gejañ gantañ en ur preti met ne oant ket deuet. Setu ma oamp aet d'e barklec'h, 'lec'h m'en doa un dra bennak d'ober, cheñch dilhad el lochenn a-dreñv pe en em fichañ un disterañ dirak ur melezour faout pe me 'oar-me, ha skarzhañ kuit alese goude.

Ha setu an nozvezh m'en doa kejet Dean gant Carlo Marx. Un darvoud spontus-meurbet e voe an emgav etre an daou zen dreistsperedek-se, ha diouzh-tu-dak en em dommjont an eil ouzh egile. Daou lagad dreistlemm paret war daou lagad all ken lemm all – al lubaner santel e spered skedus, hag ar barzh-lubaner tristidik teñval e spered a oa Carlo Marx. Adalek ar poent-se ne welis ket Dean nemeur, 'pezh a chale ac'hanon un tamm memestra. O nerzhioù a strake an eil ouzh egile, ha me, loukez en o c'heñver, ne oan ket evit mont diouzh al lusk roet ganto. Neuze eo e krogas an avel-dro hollek diboell-spontus a oa da zont, ha da gas gantañ va holl vignoned hag ar pezh a chome eus va familh en ur mell koumoulenn bouldrennek dre an Noz Amerikan. Carlo a gontas dezhañ eus Old Bull Lee, Elmer Hassel, Jane, eus Lee o c'hounit struj e Texas, eus Hassel e toull-bac'h Enez Riker, eus Jane o kantren

dre Times Square badaouet-mik gant ar benzedrin, he merc'hig vihan en he divrec'h, evit echuiñ a-benn ar fin e ti ar re sot Bellevue. Ha Dean a gontas da Carlo eus tud dianav dezhañ er C'hornôg, evel Tommy Snark, forban kamm e droad ar salioù-bilhard, c'hoarier kartoù ha sant heñvelreviad. Kontañ a reas dezhañ eus Roy Johnson, Big Ed Dunkel, freied kozh eus amzer e yaouankiz hag ar straedoù, eus e amourouzezed diniver hag e droiadoù seks hag e skeudennoù hudur, e harozed, e harozezed, e droioù-kaer. Asambles e strinkent dre ar straedoù, o saourañ pep tra gant an doare ma oa o hini er mareoù-se, hag a droas da galz tristidikoc'h ha soñjusoc'h ha goullooc'h war-lerc'h. Neuze avat e oant o tañsal dre ar straedoù evel chaogerien diroll, ha me klask mont d'o heul, evel 'm eus bet graet a-hed va buhez, war-lerc'h tud a zesache ac'hanon, rak evidon n'eus nemet ar re foll a zo tud gwir, tud hag a zo sot gant ar c'hoant bevañ, sot gant al lavar, sot gant ar c'hoant bezañ savetaet, sot gant ar c'hoant kaout pep tra d'ar memes poent, ar re na vint morse o vazailhat nag o tistagañ traoù divlaz, tud hag a vez o teviñ hag o teviñ bepred, o teviñ evel ma ra ar c'houlaouennoù roman melen burzhudus hag a darzh evel kevnid e-touez ar stered, hag en o c'hreiz e vez gwelet liv glas ar straker diwezhañ, hag an holl da vont : « Maaaaa » ! Petra 'veze graet deus an dud yaouank-se en Alamagn da vare Goethe ?

Ken bras ma oa e c'hoant da zeskiñ skrivañ evel Carlo ma sailhas kerkent Dean outañ gant un ene divent karantezus n'eus nemet al lubanerien o kaout anezhañ. « Bremañ, Carlo, laosk *ac'hanon* da gomz – setu ar pezh a fell din lâret... » Ne welis ket anezho e-pad pemzektez, hag en amzer-se e voe skoulmet o darempred dre gendivizoù herrek-spontus hag a bade noz ha deiz.

Neuze e teuas nevezamzer benniget ar beajoù, ha pep hini er vandennad a oa diouzh e du oc'h en em aozañ evit beaj-mañ-beaj. O labourat start e oan war va romant, hag ur wech skrivet an hanter ganin, goude un droiad er Su gant va moereb evit gweladenniñ va breur Rocco, e oan darev da veajiñ etrezek ar C'hornôg evit ar wech kentañ em buhez.

Dean a oa aet kuit dija. Kaset e oa bet ganin ha gant Carlo betek gar ar busoù Greyhound er 34^{vet} Straed. En nec'h e oa ur sal ma c'helled tennañ poltreoù evit ur c'hard dollar. Tennet en doa Carlo e lunedoù, 'pezh a roe dezhañ neuz un tasmant. Dean a reas ur poltred a-letu, ma selle tro-war-dro, lentik. Kemer a ris ur poltred eeun, ganin neuz un Italian a dregont vloaz gouest da lazhañ forzh piv a gredfe lâret an disterañ tra a-eneb e vamm. Troc'hañ a reas aketus Dean ha Carlo ar poltred-se e daou gant ul lavnenn razouer, ha pep a hanterenn a voe lakaet ganto en o doug-paperioù. Evit e veaj hir da Denver e touge Dean abid cheuc'h ur beajour koñvers eus ar C'hornôg. Echu e oa gantañ e droiad kentañ e New York. Un droiad a lavaran, met e gwirionez ne oa ket paouezet da gĩañ evel unan sot e parklec'hioù. Hennezh a oa implijad parklec'h burzhudusañ ar bed ; bez' e c'helle kilañ ur c'harr da zaou-ugent miltir an eur e-barzh ur c'hornig strizh, chom a-sav stok ouzh ar voger, lammat er-maez, redek diwar an eil distoker d'egile, lammat e-barzh ur c'harr all, treiñ anezhañ war-zu ur plas all da hanter-kant miltir an eur, kilañ prestik evit fourrañ anezhañ en un toullig, ha dao, ur stroñsadenn, ha ken pront gant ar starderez-dorn ma veze gwelet ar c'harr o tibradañ endra ma veze an den o lammat er-maez dija ; ha neuze d'an daoulamm betek logell ar parklec'h, evel ur gwir sportour

a vicher, reiñ un tiked, lammat e-barzh ur c'harr all nevez degouezhet a-raok ma vefe peurziskennet e berc'henn, sailhañ dindan an den, koulz lâret d'ar memes poent ma oa-eñ o tont er-maez, loc'hañ ar c'harr en ur lakaat e zor da stlakañ, ha kas anezhañ en ur grozal betek ar plas libr kentañ, treiñ, en em silañ, stardañ, er-maez, redek ; ha labourat evel-se diehan e-pad eizh eurvezh bemnoz, dre eurioù-prez an abardaez ha goude fin an arvestoù, gant e vragoù paourkaezh treu hag e chupenn roget doublet gant feur hag e votoù uzet ha dispieg o seulioù. Ha bremañ en doa prenet un abid nevez evit distreiñ d'e vro, unan glas gant roudennoù strizh, jiletenn hag all, unnek dollar war an 3^{vet} Bali, asambles gant un eurier ouzh e chadenn, hag ur mekanik-skrivañ hezoug ma oa da stagañ skrivañ gantañ en ur pañsion e Denver kerkent ha kavet labour eno. A-raok kimiadiñ hon doa debret silzig ha fav en un ostaleri Riker war ar 7^{vet} Bali, ha neuze e pignas Dean er bus skrivet Chicago warnañ, ha dao en noz en ur grozal. Ha setu hor *cowboy* kuit. Touiñ a ris e rafen ar memes tra pa vefe deuet an nevezamzer da vat ha pa vefe peurziskorn ar vro.

Ha setu penaos e krogas e gwirionez va holl vuhez war an hent, hag an darvoudoù a oa da c'hoarvezout a zo re sebezus evit ma vefe lakaet an tav warno.

Ya 'vat, ha n'eo ket hepken peogwir e oan skrivagner hag e ranken bevañ traoù nevez e felle din ober gwelloc'h anaoudegezh gant Dean, ha n'eo ket abalamour e oa va buhez war ar c'hampus oc'h ober he zalaroù, o vont da hesk ; met abalamour, en un doare bennak, en desped d'an disheñvel ma oamp a-fet tro-spered, ma tegase din da soñj eus ur breur din hag a vije aet da Anaon pell 'oa.